



Guevroc (D)
ou *A⁺ Ritok.*

CANTIC


SANT GUEVROC.




Canomp oll hirio, gant laouenedigez,



Gloar ha meleudi da Batron hor parrez



A zo bet savet e palez an Dreindet




Leun a joaustet.

TON ALL.



Canomp oll hirio, gant laouenedigez,
Gloar ha meleudi da Batron hor parrez
A zo bet sa-vet e palez en Dreindet
Leun a joaus-tet.

TON ALL.



Canomp oll hirio, gant laouenedigez,
Gloar ha meleudi da Batron hor parrez
A zo bet sa-vet e palez an Dreindet
Leun a joaus-tet.

CANTIC SANT GUEVROC.

TON : *Iste Confessor.*

Canomp oll hirio, gant laouenedigez,
Gloar ha meuleudi da Batron hor parrez
A zo bet savet e palez an Dreindet
Leun a joastet. (1)

Piou a lavaro pegen santel eo bet
Buez ha maro sant Guevroc benniget ?
Evit kement-se ret e ve kaout moüez
An alez memez.

Feiz ag esperans ha carantez guirion,
An oll vertuzion a garge e galon :
Dreist oll e kare Jesus-Christ hor Zalver,
Ag e Vam dener.

Pur evel un ael, douç, humbl ha patiant,
Morse ne zuas sae guenn e vadiziant ;
Tremenet en deuz e vuez er beden,
Ag er binijen.

Castel, Lanneuvret, Loc-Kirec, Plouzeniel,
C'houi 'zo bet testou eus e vuez santel,
Ag eus ar galloud en doa ive, neuze,
E kever Doue.

Deiz ar gouel : Da gever hirio, e palez an Dreindet
Ez eo bet savet.

*J. Bleuzen, s. j.
D'Feiz ha Breiz
1879, p. 38-*

Ag a becherien da Zoue gounezet !
Ag a glanvourien ganthan bet pareet !
Eus pep korn a Vreiz e teue hon tud koz
Da glask e vennoz.

Antrou Sant Guevroc, brema eus an Eavou,
Clevit hor e'hantie, clevit hor pedennou,
Ha taolit varnomp eur sell a drugarez,
Ag a garantez.

Grit ma zaïmp, eun deiz, oll ganeoc'h da repoz
Da velet Doue e gloar ar Baradoz
Eleach ma canimp meuleudi eternal
D'an Dreindet Santel.

Ni 'velo neuze, Jesus ag ar Verchez,
Ag en dro dezo ar Zænt ag an Aëlez
Beüzet en eur mor a blijadurezou
Ag a zelisou.

Gloar d'an tri Ferson eus an Dreindet Santel :
Da Zoue an Tad ha d'e Vab Eternel,
D'ar Speret-Santel : o zri eun Doue ebken
Gloar da virviken !

Amen.

9
1
M^r. Briquon
ou le G. Bleuzen